

(f° 215)

Disput entre ar c'here hag ar boutouer Koat.

Mar galan goud ar fesson e tuin da riman  
 eun disput a neve flam, evid e neun divertissan  
 savet entre eur c'here hag eur boutouer koat  
 Pa vezont krog en eur routeil int daou pod dilikat.

O taou o devez promettit <sup>em bize digate</sup> eun doussen <sup>uo</sup> ~~viou~~ fritet  
 hag eun tam bara quen hag eur bane da eva  
 er fin ar Kanaouen.

Mar be glepjet an anjen ar vomboard a sono  
 Da chom da sellou gant patientet eun darn a rezonieu  
 evid a lakat da zisput an eil ouz e guile  
 a non pas rima netra tout nemed ar virione.

Er goan e c'hententan eme ar boutouer koat  
 eo me a deu da chossi treit an dud dilikat.  
 A te Kere infam gant te bouteier ler  
 A zigas ar c'hlenvejou hag eun noubt bras a vizer.

eun tamik eo estimet ma etat ~~huelloch~~  
 huelloc'h evid eo da hini, pod ar boutou koad.  
 Rag ma rankfe ar veajourien balle gant chorgillou  
 e vent an anter hiroc'h o hober Kampagnou.

(f° 216)

Na pa deui an amzer da lakad an drevat  
 neuze vad eo necesser kaout eur boutou koad.  
 Ne veller den o pallad er parkeier gant bouteier ler  
 A c'hoas e fod did lavaret ned dom' ket necesser.

Les notes qui suivent, appartiennent au f° 216, et sont d'une écriture différente.  
 " Chorgel - sabot fendu. (V.) ou plutôt grands sabots -  
 chorgellad - bruit que font les sabots fendus.  
 Drevad (dreo-vad) les ensemencements - tout ce qu'on met en terre - tant  
 pour les gens que pour les bestiaux. »

364

me voar ar vad pa deu an amzer da lakad an drevat  
eo nesser kaout eur boutou koad  
me[is] pa deu c'hoant neuze da redeq er Parkeite[r] a vijou  
e c'heo skan[er]oc'h eur boutou ler evid nan deo eur jorgillou.

Na pa deu an erc'h ar skorn ag ar goan kallet  
neuze vad e ranko ar c'here paka e vinasuet  
A me a iel da verza partout dre ar markajou  
a te a sello ouzin a ganez digor ~~da~~ c'hinou.

Na pa deu ar mis meurs hag an nevez amzer  
Da lakat an habijou kaer ag ar routeier ler  
na vo ked komzet neuze demeus eur boutou koad  
eur boutou ler da valle a zo eun traou dilikat.

A liez renkes mond da di ar c'hivijer  
a na pe nemed eun tri skoet pe eun tri skoet anter  
a me a laka assamblez bete c'houerc'h nujent skoet  
Da brena koad bouteier evid ar beisantet.

Goeloc'h ze did va mignon pa c'heus eur bern arc'hant  
an neb o deveus neubentoc'h a vev onestamant.  
Me a zreb va c'hig a va iod va zouben da kreis-de  
Ordinal e hentantan beza bevet Kouly a te.

(f° 217)

Poent eo demp finissa rag an noz a dosta  
hag an hostis a ieno ma na evomp netra  
hag a roio or c'honjez demp da sortial deus e di  
ha da vond da kavet ar ger Koader a Kere.

ebars an hostalliri e ve rezoniou  
Disput e tre ar rignonet a chach bleo avichou  
ar c'hoste Krenvan a c'honid ebars en eb affer  
mar kerez ni a vello e me ar c'here.

Goude leüs kov e krogjont evel daou gi animet  
a staga de neur gana evel daou zen arvajet  
ken a rankas an hostis kemeret e vas ribod  
a skei gato var ar c'hein e fesson ma voant[er] krog.

Goulenomp eur chopinad arrog dispartia

an hostis or servicho na mar deomp den pea  
 hag evomp peb a vanac'h e fin ar ganaouen  
 An oll a rank kaout boutou pe valle dierc'hen.

(f° 218)

An hini n' deveus Kompozet an disput dilikat  
 savet en tre eur c'here ag eur boutouaer koat  
 en deveus Kompozet mes a hini e c'hanon ian ar gwen  
 hag a vellet ordinel er fin ar ganaouen.

7

Jakes Keginer, merer, en Kjegeu — 12 juun, 1851.